

Stumm dreist-ordinal an Oferenn ha pedennoù

Da heul motu proprio an Tad Santel ar Pab Benead XVI «*Summorum Pontificum* » ar 7 a viz gouere 2007 eo bet savet al levrig-mañ.

El levrig-mañ eta e kaver ar pezh a vez lennet ingal bep tro ma vez lidet an Oferenn er stumm-se, anvet *dreist-ordinal*, e latin eta, gant un droidigezh aketus e brezhoneg, keñver-ha-keñver. Pa n'eus ket a oferennoù brezhoneg, koulz-lavaret e sikouro al levrig-mañ ar vrezhonegerion a gav gwelloc'h mont d'un Oferenn e latin, kentoc'h eget da unan e galleg.

Eil lodenn al levr a zo he fal sikour d'ar bedenn e rez an tiegezhioù, pep hini anezho o vezañ e gwirionez " ilizoù bihan " (Mzh. 18, 20). Kanañ a c'hellor eta gant plijadur, er gêr da vihanañ, ouzhpenn hor c'hantikoù boas, testennoù troet diwar al latin ha war donioù gregorian. Abalamour d'o c'hened eveljust, hogen ivez ha da gentañ-penn evit ar gelennadurezh a gaver enno.

Embannadur prevez da c'hortoz un *Imprimatur* a-berzh an Iliz, gant Imbourc'h, Trelevenez, Kerzu 2009.

106 p., 12 X 18 ktm, 20 €.

*Missale romanum post concilium Tridentinum
secundum ritum Sancti Pii V
juxta editionem typicam Missalis Romani a Beato Joanne XXIII
Anno 1962 promulgatam,
uti formam extraordinariam Liturgiae Ecclesiae.
Interpretatio in lingua armoricana.*

ISBN 2-910493-26-1 EAN 9782910493264

